



## HISTOR

*Eus ar Malheur erruet gant un Den-Yaouang,  
pehini a voa cri eus e Dad hac e Yam.*

---

### *VAR TON CANTIQ AR BLASPÉMATOUR.*

**S**ELACUIT oll, Bretonet, m'o ped, cōs ha yaouang,  
Hac e cléfot un exempl meurbet zo estonant,  
Hac ouspen eo profitabl d'an oll nobl ha partabl,  
Da derri ar goal habitud zo etoues peb seurt stat.

2.

Neus cāri den n'en deve pepini e banchant,  
Qercouls goaset ha mère'het nombr bras assuramant,  
Pini so'r pec'het horrubl hep ma sonjer' ve drouc,  
Bep comz ma en o guimou, guelet e rēr partout.

11.3.17.19.2.25



## 3.

En pep fêcon ve gante ar pec'het deguizet.  
Ra zeuin evel eur maout pe vel demezelet,  
Mallos Doue, blasfemi, an diaoul d'o dévi,  
Dra vin dall, pe drouc-speret, pe' zin evel eur c'hi.

## 4.

Cent ma zomp prest da ober un dra pe un affer,  
Comzou infam ha lubriq a leveromp bep guer,  
Hep sonjal en ur pec'het'e formiomp ur chaden,  
Ma ne guitaomp an habitud e zayomp d'an ifern.

## 5.

Evit donet d'eu terri, deuomp da gonsideri  
Ar pez a zo aruet a neve en Guintini,  
E qever un Den-Yaouanq a voa atao e coler :  
Ra zeuin evel eur c'hi a lavare bep guer.

## 6.

Un habitud quineret voa qementse gantau,  
Qement comz a hrononce ne glèvet qen quantan :  
Pe vat pe zrouc a raje, horrubl eo compreni,  
E lare : mar er gràn-me, mè yel evel eur c'hi.

## 7.

An den yaouanq-mâ savet demeus eur famill vat,  
Hac evel calz, hep respes nac evit mam na tad,  
Dre gomzou caér a dennas digante o moyen,  
Ha goude' voent reduiset da c'houl an alusen.

8.

O sonjal vije furoc'h pa vije etablisset ;  
 An daou baour-qès cōs-màn o deveus bet cedet  
 Qement aparchante oute d'o mab dirac noter ,  
 Goude e rencjont souffri an naon hac ar viser .

9.

Vel ma voa laqet da vestr , e commanças timat  
 Da c'hourdrousi ha da sqei gant e vam hac e dad ,  
 Dont da alc'hoea ounte bete mèmes ar bara ,  
 O sonjal o laqaje gant naon da berissa .

10.

Hep gallout , ar malheurus ! pelloc'h o zuporti ,  
 E renq an daou baour-qès cōs monet ermes an ti ,  
 Lezel gantàn o moyen ; ô pebes nec'hamant !  
 Rangout clasq an alusen ha mont en un toul camp .

11.

Evea m'en doa moyen ar c'hrouadur ingrat ,  
 E voe deàn proposet da zemezi timat ;  
 Ur plac'h gentil a gavas , honest , fur ha prudant  
 Dre aliou tud yechant anéan voe contant .

12.

Souden e voent demeet . Pa voe deut an teñmen  
 Evit ober an eured , siouas , pebes anqen  
 O devoe tud an eured , hac ar plac'h c bricd ,  
 O velet ar malheurus c pc stat voe laqet .

Qant evit ma héureujas ar plac'h a lavaras :  
 Na zemezin qet deoc'h ma na ve var ar plac'  
 Ho tad hac ive ho mam assambles gant va re,  
 Evit rēi demp o bennos da veva en grāc Doue.

An den miserabl neuse a gavas digare :  
 Va zad, va mam a zo cōs, leun int a batourente ;  
 Hac ouïspen int chomet clān var o guele meus clēvet,  
 N'en dē qet un domach bras pa vent o daou erezet.

Ar plac'h, terrubl estonet, a respont promptamant :  
 Birviqen chanç n'or bezo, comz a rit insolast.  
 Dre'r bēvaré gourc'hien Doue en ens commandet  
 Enori an tad, ar vam, ha douguen dé respect.

Chanchit propos, emezan, m'o ped hac ho supli,  
 Mar deu ar re-se d'am eured me yēl evel eur c'hi ;  
 Ne fot qet din e lare o tud vent ampoesohet,  
 Ma teufe'n daou lous cōs-se d'aparissa em eured.

Evel pa vije'r miracl, Doue ractal a bermet  
 E teu an daou baour qès cōs d'aparissa er banquet ;  
 Siouas, o mab libertin, horupl è compreni,  
 Pa voa guir vella'r banquet e za evel our c'hi.

18.

Alies epad e vñc en devoa goulennet,  
 Vel ma voa e habitud beza er stat-se laqet;  
 O vea leun e yusur e voe diffiguret,  
 Neinet e ben, e visach, e form eur c'hi barbet.

19.

M'o les da gonsideri pebes spont hac eston  
 O devoe tud an heured, crena r  o c'halon  
 O velet eur seurt torset  ruet en o fresan  :  
 O pebes tristidiguez e lec'h rejouissan !

20.

Hep na debri nac eva e ohomas er stat-se  
 Er spa  eus a no devez o sonjal nos ha de;  
 P'eo bet bolonte Doue eo  t en eur seurt stat,  
 O vea cri ha dinatur eus e vam hac e dad.

21.

Dre ma voa calz a famill a bedas evitan,  
 Doue hac ar Verc'hes Vari da r i ar c'hra  dez n,  
 Goestet voe d'eur plac devot, warben an no devez  
 E teus d'e stat adare, dre voyen ar Verc'hes.

22.

Setu aze eun exempl hac ousp n eur miracl,  
 A zo meurbet profitabl d'an oll, nobl ha partabl,  
 Da derri ar goal habitud, da epori mam ha tad,  
 Vit caout recompan  en  n digant hon Doue mad.

*AME N.*



## G U E R Z

**VAR SUJET DAOU ZEN-YAOUANQ MASQET.**

*Var un ton ancien.*

1.  
**S**PERET-SANTEL, me ho suppli da rēi scélérien d'am speret,

Evit discléria eun exempl a zo pitoyabl meurbet,  
 Erruet gapt daou zen yaouanq , a voa o daou o c'heva  
 Ebars en eun hostaliri da volarje diveza.

2.

Daou zen yaouanq a galite pere n'anvàn qet amàn,  
 A voa o daou o tebochi , siouas , et var ar bed-màn !  
 Na pa voant da yea meo , ma zint en em goncluet  
 Da guemer eur vascaraden da vont en nôs da redec.

3.

Possedet e voaint o daou , siouas gant an drouc-speret:  
 Ar c'henta croc'hen eun eujen var e guein en deus laqet,  
 Hac eguiile croc'hen eur c'haor , na ma lerjont neuze;  
 Ni a zo bremàn diaoulou da renta brezel da Zoue.

- Mont a r̄z an daou zeni yaouang ebars en q̄ēr da redet,  
 Hac unan demeus anez e deveus bet rancontret  
 Eur b̄leq pehini a zougue ar sacramant dereat bras ,  
 Evit cas da eur paour q̄ez coz pihini a voa fall bras.

Heuliet en dens ar sacramant bete ti ar paour q̄ez clān,  
 En toul an nor e zeo bet chomet ma neveus lavaret deān :  
 Me zo an diaoul , emeān , a zo deut da dal da dy ,  
 Hac en instant ma vi maro da ene a yel ganén.

Ar paour q̄ez clān en e voele en em laga da voela ,  
 Ar b̄leq ous e gousoli en deveus lavaret dezān :  
 Tavit , va mignon , emeān , tavit ha na voelit qet ,  
 Unan eus ar vascarien zo deut envoas d'o quelet.

Ar b̄leq ous en em distrei ous an den milliguet-mān ,  
 Gant an hosti en e zaou zorn e deveus lavaret deān :  
 Lam da vasq̄ divar da visach , sete amān da Zoue ,  
 Ha gantān te vo p̄gnisset qent ma vo varc'hoas an de.

Hac én en em distrei neuse gant eur zellou arogant ,  
 Gant comzou vil ha disonest eus Jesus er sacramant :  
 Me zo un diaoul , emeān , un enemi bras da Zoue ,  
 Hac a rento dean brezel qercouls en nos hac en de.

P'en devoa laret e gómzou eyél eut den arrajes,  
 Er mes an ti neuse souden var ar ru è sortiet;  
 Mes pa yas en avis crial e sant e voqd o yena,  
 Maro-mic è , var ar pave, siouas, è deut da goea.

Eguile gant croc'hen ur c'haor dre tuyou gér o redet,  
 A rancontras e gamarad na var ar ru gourveet :  
 Me zo ré hardi, emeán, va c'hamarad, da sponta ;  
 Na c'heus bremâ nemet sevel, ha ni yelo da eva.

Caer en devoa emâ guervel e gamarad milliguet,  
 E vasq a lam divar e visach o senjal gouell e velet;  
 Mes pa velas e voa maro , e galon a zo ranniet,  
 Ma tolas eno ar c'hroc'hen , hac eus ar vro è sortiet.



FIN.

---

E Montroulez, eus a Imprimé LÉDAN.